



CANTIC

230

SANT PAOL ERMIT.

PEL a zo em boa bet esper
Da implija lod va amzer,
Da ober canticou breton,
Agréabl da bobl va c'hanton.

Mes petra servich agréabl,
Ma na ve ive profitabl
Evit cundui ar vuez
En hent eus ar silvidiguez.

Rac-se e meus sonjet erfin
E vize util d'am dessin
Laqât e brezonec Leon
Exemplou a zevotion.

Evelse e meus bet ezom
Da gaout recours da Sant Jerom,
En deus e latin recitet
Historiou calz a ermitet.

Sant Paol, ganet en Thebaïd,
E zê bet ar c'henta ermit,
Hac hennez a liqin er penn;
Doue ra gunduo va fluen.

Speret divin hac adorabl,
Bezit em andret favorabl,
Grit din ar c'hraç, an avantach
Da ziguern an ermitach.

Commanç a rin, gant ho siconr,
 Var ton Guertz Sant Yan-Badezour,
 Pini en deus er solitud
 Annoncet ar Messi d'an dud.

Guechal e zoa împalaëret,
 Daou zen cris ha cruel meurbet,
 Valerian ha Decius,
 Adversourien hano Jesus.

En memes amzer, Sant Jerom,
 Ar Pap Santel Corneil e Rom,
 Ha Sant Cyprian e Cartach,
 A sacrificjont d'o arrach.

Calz a Ilisou en Egypt,
 Ha calz ivez en Thebaïd,
 A anduras un distruch trist,
 Abalamour da Jesus-Christ.

Neuze ar gristenien fidel
 O devoa c'hoant bras da vervel,
 Ha da rei o feun dar c'hleze,
 Evit souten an hano-ze.

Mes Sant Cyprian a lavar
 Penaos an tirantet barbar
 A invante pep seurt maliç
 Evit asten pell o supplic.

Evit merq eus a goemense,
 Sant Jerom a scif goude-ze
 Daou exempl cruel da gredi;
 Christenien vad, ententit-y.

Un den en devoa dre feiz cre

Trec'het an tân hac ar c'bleze ;
 Mel a voe leget d'e fropa ,
 Ma teue ar c'helien d'e daga.

Un all, dre ur vertuz constant,
 En devoa trec'het peb tourmant,
 A fallas d'an dud displeal
 Da goll d'e blijadur brutal.

Rac-se, ne doa get hep sujet
 E zoa d'ar gristenien tec'het
 Etonez loëned ar solitud,
 Evit feza maliç an dud.

Retornomp eta gant Jerom,
 Ha lezomp ha Cartach ha Rom,
 Evit antien en Thebaid
 Da velet ar c'henta ermit.

Sant Pol ermit n'en devoa c'hoas
 Nemet an oad a c'huezec vloas
 Pa varvas e vam hac e dad,
 A lezas gantâ danvez mad.

Ur c'hoar demezet en devoa,
 Gant ouñnes et sonjas beva ;
 Mes abret e tenas da santout
 N'en devoa get re da fiziout.

Ne voa qen brud dre ar c'hanton
 Nemet ar bersecution
 Ha maliçou ar bourevien
 O sonjal coll ar gristenien.

Sant Paol, dre ur brudanç antier,
 A zonzh tec'het diouc'h an danger,

Laqât e gorf e surele,
Hac en assuranç e ene.

Evelse en em retiras
A bell diouc'h un darempret vras,
Ecartet en eur villagen,
Da c'hortos fin ar gorventen.

Mes pe da dra na angach qet
Goetis ar madou eus ar bed?
Evit beza e heritour,
E vreur-caër a yoa e draitour.

An diaoul a gupidite
En em rentet mestr d'an den-se,
A imprimas en e cervel
Discuil e vreur-caër da vervel.

Pa santas ê grêt e dessin,
En em strincas var e daoulin,
An daelou en e daoulagat,
En e c'henou an huanad.

Va fried, a bep carantez
Oc'h Doue hac ouzin ivez,
Souffrit va breur Paol da veva,
Ne meus den ebet nemeta.

Ma n'oc'h eus egard ouzin-me,
Considerit va bugale :

Ar goad zo qemesqet enno
A sonjit da gass d'ar maro!

Concevit ervat peguennes
E ze deomp va breur compes;
Allas! ne ouffes qet sqei Paol,

Na vemp tizet oll gant an taol.

Caër en deus ar c'hreg hirvoudi,
Guela, crial ha regeti,
An avaricius barbar
Zo insansibl, dall ha bouzar.

Pa na ell touch calon e den,
Ar vreg afflijet ne ell qen
Nemet avertissa e breur
D'en em zivoal dioc'h ar maleur.

Sant Paol, fur en e yaouanqis,
Pa recevas ur seurt avis,
Prontamant en em retiras
Dounnoc'h etouez meneziou bras.

Aviziou en em arrête,
Aviziou all ec'h avance,
Oc'h ober, en hao Jesus,
Eus a necessite vertus.

Erfin, qelies ec'h avanç,
Ma er cundu ar brovidanç
En ur menez huel a guein,
Leun eus a guerrec ha vein.

En e ouelet pa zisqennas,
Ur c'hos cavern a remerqas,
An antre añezan clozet
Gant ur men ampustur meurbet.

Eguis pep den a zo bepret
C'hoantec da velet traou secret,
Sant Paol a glasqas ar voyen
Da denna'r men ha da antren.

Diabars pa zoa avancet,
 E cavas sêçon ur porchet,
 Clos antieramant a bep lec'h,
 Nemet an digor dioc'h an ec'h.

Eur goz vezen balm en andret
 Natureclamant elevet,
 A hed, a ledan, a asten
 E scoultrou da servich toen.

Eus a zindan ar vezen-se,
 Ur sourcen sclêr a sortie,
 Ha qazi er memes andret
 En douar e zê da guzet.

Sant Paol o veza bet ar c'hraç
 Da veza cavet ur seurt plaç,
 E c'hoantas tremen e vuez
 E peden hac e santelez.

Ar vezen balm gant e frouëz
 A fournisse magadurez,
 Gant e delion ty hac habit,
 Hac ar sourcen door d'an ermit.

Eno oa eat buez hor Sant
 D'an oat a drizec vloas ha cant,
 Gant Doue heppen anavezet,
 Gant an ælez hac al loënet.

En un dezêrt all Sant Anton,
 Qenta abat eus ar c'hanton,
 Dec vloas ha tri-uguent oa oajet,
 A deuas ur sonch en e speret.

En despèt d'e zevotion

En devoe ar brezomption,
 Biscoas ne oa bet er bed-mâ
 Ermit santeloc'h egueta.

Mes pa zedo ur certen nos
 A greis e beden o repos,
 Eu devoe revelation
 A enep e brezomption.

En em dizabuzit, Anton,
 Ne d'è qet guir ho songeson;
 Arauc eus un den ho surpaç
 Hac e santelez hac e graç.

Hac evit na donetot qet,
 It expressamant d'e velet,
 Mes na zaleit morse oll,
 Rac n'eus qet a amzer da goll.

Evel ma sant goulou an deiz,
 Anton a barti leun a feiz,
 Hac hep espern na traon na creac'h,
 Hac eat ne oar qet pe da leac'h.

Pa sorti eus e ermitach,
 N'en deus na guid nac equipach
 Nemet ur voalen da zouten
 Memprou simpl ha corf ancien.

An domder vras vardro cresteiz
 A rent an den coz meurbet squiz :
 Gouscoude ne goll qet courach,
 Qent-se en em fiz davantach.

Va Doue fidel, eme Anton,
 Me meus fizianç evel rêzon

Em conduot cruez o guer
Da velet ho guir servicher.

N'en devoa qet achuet mad,
N'en em offras d'e zaoulagad;
Ur vizion estranch aoualc'h,
Ur monstr, anter den, anter marc'h.

Sant Anton, goude sin ar groas,
Oc'h an den-marc'h a c'houlennas:
Va c'havalier, din livirit,
Peleac'h amâ eus un ermit.

Ar monstr e zent o tiscroigna,
Hac o clasq gromolat un dra,
Evit ma selle effroyabl,
A seblante comz agreabl.

Gant e zorn deo astennet
E tiscuez an hent goulennet,
Goude d'ar post o galoupat,
E tisparissas d'an abat.

Ha satau evit e sponta,
En delfe forjet ar monstr-mâ,
Pe an dezert e anjandret,
An dra-ze ne assuront qet.

Qement oue Anton estonet
Eus ar pez en devoa guelet,
A avance atao e hent
Gant mui a gourach eguet qent.

Pa edo erfin arruet
En un draouyen meinec meurbet,
Un denic bian a velas,

A seblante estranehos bras.

E fri cam a voa gromellec,
Corre e dal a voa cornee,
Hac evit ar penn izella,
Troid gavr en devoa dindanna.

Anton, evel ur soudard mat,
Atao prest ha prompt d'ar gombat,
Leon a feiz hac a esperanç,
Ne gollas qet e assuranç.

Ar monstrie-se, gant ur vouez calm,
A ofiras dezâ frouez ar palm
E sin a beoc'h hac a union,
Hac evit e bourvizion.

Anton, o velet qementse,
A lavaras dezâ neuze :
Va mignõn, me garre gouzout
Pe a leac'h oud, na piou out.

Me zo den mortel emezâ,
Unan ar bobl an dezert-mâ,
A zo amâ en em rentet
Da viret va banden d'envet.

Guechal an idolatriach
O estime Doueou sovach,
Neuze satyret ha faunet
Gant an dud sot e oamp hanvet.

Pedit evidomp, ni ho ped,
Hor mestr commun zo deut er bed,
Pe a hini e red ar brud
E qement plaç ma tivoan tud.

000060

Anton a c'blebias e visach
 Gant joa o clêvet ar sovach,
 Oc'h assuri oa publiet
 Jesus e pêvar c'horn ar bed.

Goude ze, hep en em zale,
 E cunnuas da vale,
 Ha ne remerqe davantach
 Nemet roudou loënet sovach.

Abaoue an deiz diagent
 Ezedo Sant Anton en hent,
 Ilac e oue contraign an nos-se
 Da loja er c'hoad adare

Pa oa an deiz prest da darza,
 E remerqas a dost dezâ
 Ur vleizes hac y o redec,
 Diadevet gant ar sec'het.

Oc'h e heuilla bepret a vel,
 E remerqas an den santel
 En un toul dindan ur menez,
 En em arrête ar vleizes.

Sant Antou e heuill er c'havarn,
 Ilac a applie e ziouscouarn
 Da selaou hac én a glesse.
 Trouz ebet dre ma c'havauce.

Erfin eus an devaligen
 E remercas ur sclêrigen,
 Hac oc'h hasta mont d'e c'hichen,
 E reas trouz oc'h heurta ur men.

Sant Paul gant an drouz-a flachas,

Ha dor e groten a zerras;
 Digoret eo seblant expres
 Da furnissa dour d'ar vleizes.

000061

Auton, stouet var e vizach
 Ouspen hed c'houec'h heur horolach,
 A grê a zirac an nor,
 O c'houlen humblamant digor.

Servicher Doue, emezâ,
 C'houi oar pion oun-me zo amâ,
 Pez a lec'h ha p'evit sujet
 Ezou amâ en em rentet.

Me anzae ne veritan get
 Caout an avantach d'ho quelet;
 Mes goucoude, ma n'ho quelân,
 Birviquen ac'han ne flachân.

Ha crissoc'h oc'h-u oc'h an dud
 Na doc'h egnet al loened mud
 A recevit en ho croten,
 Da eva dour eus ho sourcen.

Me meus clasqet, ameus cavet,
 Sqei a rân, ne zigorer get;
 Ma na zigorer, me varvo :
 Va entertet nep a garo

Tavit, eme Paol, list ho trouz,
 Den far meurbed en eur gourdroutz,
 C'houi a garre mervel aze,
 Me ya da ampech qementse.

Neuze Sant Paol gant ur joa vras
 A ziguemer Auton ebais;

Dre o hano en em galvont,
A vriat en em saludont.

Goude trugaracât Doue,
Rei ar peoc'h an eil d'eguille,
Pa oant azezet er groten,
Sant Paol a gomzas evellen.

Chetu amâ ar cos, den indin,
A goust deoc'h fatig ha chagrin,
Guen e vleo, brein e izili,
Ha prest e boultr ha dismanti.

Mes pa ze ar garantez vad
A zouten peb tra en ho stat;
Contit din pe feçon e ren
En amzer-mâ an natur humen.

Pe seurt impalaër zo bremâ
O c'houarn ar bobl er bed-mâ?
Hac éu a gaver c'hoas tud dall,
Ha payanet evel guechall.

A greiz ma comze evellen,
É veljout ur vran er vezen,
Hac a zisqennas etrezo,
Da zigas eur bara dezo.

Neuze Sant Paol a lavaras :
Providanç Doue a zo bras;
Ya breur, ha c'hui na vel amâ
Penaos e ro deomp da leina.

Tri-uguent vloas a zo dija
M'am beze un anter bara;
Mes chetu elec'h un anter,

Pa zomp daou ur bara antier.

Goude beza grêt o feden
E rejont var bord ar zourcen,
Hac eno evel tud modest
Gant bara ha dour e rejont fest.

Ha goude ze ahed an nos,
An orêzon oue o repos;
Ha matin mat chetu qelou
A veus Anton en e zaclou.

Pel zo, eme Paol, me ouye
Edoch en dezert couliz a me;
Rac guechal en devoa hon tad
Prometet din ur c'hamarad.

Mes pa zê deut ar poent bremâ
Din da zilezel ar bed-mâ;
Pa meus grêt va c'harielen,
Me a esper ar gurunen.

Pa glêvas Anton qement-mâ,
E commanças druz da ouela
Ha da bedi an den santel
Na deuze qet d'e zilezel.

Va zad, va grit compagnun deoc'h,
Pa zeot, va c'hassit gueneoc'h;
Nonpas, va breur, ne qet c'hoas prest,
Affer zo ac'hanoc'h er bed.

Mes pa nelle re o poania,
O ped den da guerc'het bremâ
D'am sebelia, va mignon bras
▲ ar vantel digant Athanas.

000062

An den santel ne edo qet
 E poan da veza sebiliet,
 Mes expres e pelle Anton,
 Gant aon ne ranje e galon.

Anton estonet, afflijet
 Eus ar pezh an devoa clêvet,
 A boq de faç ha d'e zaou zorn,
 Ha de solitud a retorn.

Arruet en e vonaster,
 Gant cals a boan hac a scuisher,
 Gant ampressamant vras e ten
 Ar vantel eus e celulen.

E zisqibien a c'houl outâ :
 Hon tad, petra eo qement-mâ?
 Pealeac'h e zeut-n, na ma zit,
 Hac evelse hon dilezit?

Gant e bres ne fell qet da Anton.
 Rei dezo satisfaction :
 Anzer a zo, eme ar sant,
 Da devel, anzer da barlant.

Neuze souden e za en hent
 Boannec'h eguet diagent,
 Gant aon abars ma c'haruje
 Na vize Sant Paol a varfe.

Antronos pa n'en devoa qen
 Nemet teir heur hent da dremen,
 E velas Paol resplandissant
 O vont eu hent ar firmamant.

Anton eu em string d'aa douar,

A ouïel, a gri gant e c'hlac'har :
 Ah! Paol, petra a rit-u din-me,
 Va abandoni evelse?

Torret e guenén va c'halon,
 O redet d'ho caout, va mignon,
 Ha c'hoi am c'huita qer yen-ze,
 Hep lavaret din un adie.

Ar rest an hent ne seblant qen
 Nemet nijal evel un en;
 Oc'h adren er greden er fin,
 E cay ar c'horf var e zaoulin.

E benn eün, e zaouarn savet,
 En e hostur acustumet,
 Hac oc'h e gredi e buez,
 En em string d'an daoulin ivez.

Mes pa sautas ne denne qet
 Huavad na halan ebet,
 E zeas gant d'aelou da boqet
 Da gorf an ermit decedet.

Étoues mantel Sant Athanas
 Ar c'horf ermes a astennas,
 Goude commanças hirvoudi,
 E faot danvez d'e enterri.

Daou leon eus ar re vrassa
 A zeuas etreze ennâ,
 Hac o lipat chouc e dreit,
 A ynd caon o mignon ermit.

Goude en em leqont e prepar
 O daou da scrafat an douar,

00006

Hac e reont un toul suffisant
 Evit enterri corf ar sant.

Da gaout Anton e zeont goude,
 Lipat e dreit a reont ive,
 Hac éu evit paeamant tout,
 O binig, o c'haç en o rout.

Goude beza gant ar psalmou
 Grêt tout herves ar c'hustumou,
 Ec'h anterras ar c'horf er faos,
 Hac e zeas er groten d'an nos.

Antronos abars partia,
 O fallout dezâ herita,
 E cassas gantàn un habit
 Grêt a zeliou gant an ermit.

Amâ em be occasion
 Da ober exortation;
 Mes guell ê guéneñ finissa,
 Rac neus mad re eus a netra.

Ne deus vertuz christen ebet,
 Na gaver amâ qelennet;
 Me ho less d'en em aqita,
 En oc'h uzach d'o imita.

Qement den a glêvo cana,
 Pe a lenno an histor-mâ,
 Evit ar scrivagner pedit
 Ma vezo consort d'an ermit.

FIN.